



# CONVERSION

## MARI-MADALEN.

*Par ton Guerz ar Gananeen.*

### MARTHA.

MADALEN, savit eus ho qüele,  
Da vont d'ar bredisication :  
Jesus a sermon hirie adare,  
Clévit-én gant attantion.  
Bez en deus ur secret excelant  
Da douch calon ar bec'herieo,  
Pa vent quer calet ha diamant,  
O rento tom demeus a yen.

En em habillit gant dilijanç,  
Gant aon na vec'h re divezat ;  
Tostait ountâ gant confianç,  
Ha poezit e gomzou erfat.  
Esper a meus e viot touchet  
Qent ma finisso ar sermon,  
Pe autramant eo ret lavaret  
E zeo caledet ho calon.

### MADALEN.

Va c'hoar Martha, me yêl d'e velet  
Ha d'e glêvet en e sermon,

Evit ma contantin ho speret,  
 Ha nonpas gant devotion.  
 Me am bezo ar guriosite  
 Da laqat eves pis outan,  
 Evit ellout, goude qementse,  
 Rei ur güir rapport dioutan.

### JESUS.

Eur pastor mad a goll un dànnad,  
 En deveus eur c'heus bras dezi,  
 Hac a abandon ar vandennat  
 Evit mont da glasq anezi.  
 Me vel unan zo bet diànget,  
 Hac a meus ur joa vrás outi :  
 Me he laqai etoues va dénved,  
 Eus a lec'h ne ziànqo mui.

Ene superb, calon revoltet,  
 Evidout e teuàn da sermon ;  
 Me a meus da velet o tonet,  
 C'hoant a meus da douch da galon ;  
 Digor an nôr d'ar Speret-Santel,  
 Hac en em abandon dezàn,  
 Na ziscléryi pelloc'h ar brezel  
 D'ar graçou ac'h eus digantân.

### MADALEN.

Jesus, va Mestr ha va güir Autrou,  
 Va c'halon oc'h eus gonezet ;  
 Me rîi usach vad eus ho craçou  
 Pelloc'h en dra vezin er bed.  
 Me ya da güittat va ornamanchou,

Va c'halon a zantàn mantret.  
 Adieu d'an oll gonpagnuneziou  
 Ha da guement a meus caret.

### MARTHA.

Petra eo eta, va c'hoar Mari?  
 Honnes zo ur chenchamant pront!  
 Perac e teut d'en em desoli?  
 Ha den en deus grêt dêc'h affront?  
 Foula rit, evel pa vec'h follet,  
 Hoc'h oll ornamancheou caera,  
 Ha pa vezint ganeoc'h collet,  
 E rancot adare preua.

### MADALEN.

Va c'hoar Martha, va list da ober,  
 Jesus en deus va goueset,  
 En deus va laqeat en coler  
 Ouz ar pez zo éaus d'am pec'het.  
 Me ne bresia mui janes laqea  
 Dillat eus a ur pris quer bras;  
 Me zougo bremâ fris ha lien,  
 Ha nonpas satin na damas.

Ar c'horf-mâ, pini zo bet ornet  
 Gant dillajou caer ha traou all,  
 Ne vezo mui pelloch goloet  
 Nemet gant ar c'hos dillat fall.  
 An douçder en deveus bet santet  
 O touguen voulous ha satin  
 A vezo evit bijen chenchet  
 Ebars en tolliou disciplin.

## MARTHA.

Ha possubl ve, c'hoar Madalen,  
 E pe bet ur seurt donézon?  
 Eur joa vrás am bezo da vijen  
 Da peza galvet d'ar sermon.  
 Qê, red buan da vanget Simon,  
 Ha lèz an dud da lavaret;  
 Gra offr da Jesus eus da galon  
 Dirac ar Pharisianet.

## MADALEN.

Lavaret pepini a garo,  
 Me ne ràn fors eus an dra-ze;  
 Jesus am c'har ha me er c'harc,  
 Mestr eo din ha d'am bolonte.  
 Me voelc'ho e dreid gant va daelou,  
 A zirac Simon hac e dud,  
 Hac a rai goap eus o sansurou,  
 Hep mez nac aon rac o goal vrud.

Va daoulagad, roet oc'h eus daelou  
 Da voelc'hi treid va medecin,  
 Ha c'houi, va c'halon, huanadou,  
 Petra benac ma ven indign.  
 Va memor, o pet sonch anezâ  
 E pep heur hac e pep momet;  
 Va bolonte, tommitt diountâ,  
 Na scuizit qet ouz e garet.

## AR PHABISIAN.

Ma ve an den-mâ eur güir brofet,  
 E guis ma layar sur e zeo,

Ne lesfe qet ur plac'h debordet  
 Da sec'hi e dreid gant he bléo,  
 Na ne lesfe qet tostât ountâ,  
 Ne rafe qet stad anezi;  
 Mes donet a rafe d'e c'hanna,  
 Ha d'e chasseal eus an ti.

Ne deus ouz e dreid frottet ongant  
 Nemet gant dessign d'e laqat  
 D'e c'haret ha da veza contant,  
 D'ober anezi bepret stat;  
 Rac eviti da scuilla daëlou,  
 Daëlou tromplus eo ar re-ze,  
 A elfe servichout da laçou  
 Da drompla an nep na sonchfe.

### JESUS.

Simou, n'anavez mui ar vreg-mâ;  
 Ne deo mui evel ma zeo bet;  
 Ur galon bur e deveus bremâ,  
 Renoncet e deveus d'ar bed.  
 Desqi a ra d'an oll o never,  
 Ha memes dide da guenta:  
 Qemer-hi evit ur millouer,  
 Deus da ober ar memes tra.

Ne sonch qet did e ve criminel  
 Ar garantez e deus ouzin;  
 Comzet e vezò em Aviel  
 Eus a guement vad a ra dia:  
 E c'hrimou zo desi pardonet  
 Abalamour d'e c'harantez,

Hac abalamour ma zeo fachet  
Da veza grêt fallagriéz.

Qê, grêg, en peoc'h, en paciantet,  
Da feiz en deus da c'hrêt salo;  
Pardonet eus dit meur a bec'het,  
Bez fidel betec ar maro.  
Publi, en despet d'ar Judevien,  
Penaos ec'h eus cavet moyen  
Da veza did da grim pardonet  
Gant Doue, ar Mestr souveren.

### MADALEN.

Ah! permetit d'ho servicheres  
Da chom bepret en ho presanç,  
Rac aon na ve quer maleuruses  
D'oc'h offanci dre inconstanç;  
Nac vit ma voezo ar Judevien  
N'en deus caus da gconversion  
Eus ar bec'heres vrás Madalen  
Nemet ho conversation.

### MARTHA.

Autrou, n'hon eus biscoas meritet  
D'ho receo ebars en hon ti,  
Rac se n'oun qet penos e priset  
Dont da renta bisit deomp-ni.  
Commandet eo bet ar Judevien  
Da barlant ha da vormuri  
Abalamour d'am c'hoar Madalen  
Dre m'oc'h eus estim eviti.

## JESUS.

Hervez o goal inclination  
 E teu'r Judevien da fuji',  
 Ha dre ur speret' ambition  
 E fell dezo va sansuri.

Ha ne ouzont qet ar medecin  
 A lèz an dud o deus yec'het  
 Evit rei d'ar re a zo infirm  
 Soulajamant en o c'hlénvet.

Eus a ene Mari-Madalen  
 Me meus chasseet sez clénvet,  
 Hep n'oar nicun eus ar Judevien  
 Pe fécon e meus-int casset.  
 Ennón e laqas e c'honfianç,  
 Ar pez zo caus eus e yec'het;  
 Ma na vez er medecin fizianç,  
 E' zeo dies bras caout remed.

## MADALEN.

Autrou, poc'h eus bet ar vadelez  
 Da zonet d'hon ti d'hor ghelet,  
 E zeo just deomp-ni ar joa discuez  
 Hon eus ouz ho tiguemeret;  
 Mes grit d'am c'hoar Mari labourat,  
 Ne ra nemet ho contempli;  
 Livirit dezi n'en deo qet mat  
 Chom bepret da feneanti.

## JESUS.

Lest Madalen bepret em presanç;  
 Beza meus outi carantez;

Me estim e repos , e silanç ,  
 Calz mui eguet ar pez a rez :  
 Hi e deveus grêt ar choas güella ,  
 Ha den n'em lamo diganti :  
 Neus nemet un affer er bed-mâ  
 Necesser da effectui .

MADALEN.

Va Doue , va Mestr , va c'harantez ,  
 Penos eta rìn-me bremâ ?  
 Gtit ma varvin ganêc'h assambles ,  
 Ha va zennit eus ar bed-mâ .  
 Pa ho quélân er groas o souffri ,  
 N'ellân qet miret da vouela ,  
 Ha p'o quélân en oc'h angoni ,  
 E teu va c'halon da ranna .

JESUS.

En em gonsol , greg carantezus ,  
 Me zalc'ho did fidelite ,  
 Ne vezo qet collet did Jesus ,  
 Dont a rai da caout adare .  
 Destum pis ar goad a meus scuillet  
 Var an douar ebars ar groas ,  
 Ha deus bepret ato d'am c'haret ,  
 Da recompanç a vezo bras .

MADALEN.

Maro eo Jesus ! petra rìn-me ?  
 Bourrevien , c'houi a zo cruel !  
 Da viana , va lazit ive ,  
 Douç è dio gant Jesus mervel .

Va daoulagad , deut da rei daëlou ,  
 Va c'halon , deut d'en em ranna ,  
 Ha grit qement demeus a ganvou  
 Ma zin souden eus ar bed-mâ.

Adieu d'am oll laouenidiguez ,  
 Pa zeo maro Jesus bremâ ,  
 Ne velân nemet tristidiguez ;  
 E zer da vont d'e liena :  
 Deomp eta , ô va c'hoarezet ,  
 Gant e Vam d'an antêramant ;  
 N'en deo qet just e ve dilezet  
 Pa e deus brassa nec'hamant.

Eus ar sizun an devez qenta  
 E zimp mielia da vit Jesus ,  
 Evit ma ellimp laqat euntâ  
 Demeus an ongant precius ;  
 Mes piou hon sicouro da lamet  
 Ar men bez a ze penser bras ?  
 Ouspen e zeus laqet soudardet  
 Var e dro da zioual ar plaç.

Me vel penaüs ar men zo ruillet  
 Dor ar bez ma edo Jesus ,  
 Ouspen em eus aon ve transportet  
 E gorf gant tud malicius :  
 Ha qement a meus a nec'hamant  
 N'on petra a meus da ober ,  
 Pe me dle chom amàn paciant ,  
 Pe mont de glasq dre ar c'harter.

10

## DAOU AEL.

Petra c'hoarvez déc'h, greg desolet?  
 Ha den en deus grêt déc'h anui ?  
 Livirit perac oc'h afflijet,  
 Ha ni a deui d'ho soulaji.  
 Arrêtit un nebeudic amâ,  
 Contit ar sujet ho clac'har,  
 Ha ni ho sicouro a vremâ,  
 Mar gallomp, eus hon oll pouvoar.

## MADALEN.

Me meus sujet d'en em desoli;  
 Collet e meus va madou oll,  
 Ha n'oufe den dont d'am soulaji,  
 Na d'am c'honsoli eus va c'holl,  
 Nemet reï rafet dñs va Zalver,  
 P'ini zo diganén lamet :  
 Me yêl patout dré bep seurt amzer  
 Qen n'em bezo en rancontret.

Petra zo grêt a gorf va Zalver ?  
 Deut oan en esper e velet :  
 Livirit dñs eta, Jardiner,  
 Ha c'houi oc'h eus-én transportet ?  
 Deut oun da lacât ongant ouatâ ;  
 Mar oc'h eus nep truez ouzin,  
 Livirit din p'en andret e mâ,  
 M'en liqin elec'h m'er c'hivin.

## JESUS.

Va migoones Mari-Madalen,  
 N'am c'hlasq mui : chede me amâ ;

Eu em denn ha pella diouzin ,  
 Ne dlees qet touch ouzia bremâ :  
 Did oun en em disquezet qentâ ,  
 Evel ma oun deut eus ar bez ;  
 Ne allân qet dont da resista .  
 Ouz nep am c'hlasq dre garantez .

Qâ d'avertissa va zisqibien  
 Penos e zôn ressuscitet ,  
 En despet gardou ar Judevien ,  
 Pere voa lajet d'am miret ,  
 Ha na chom qet hep avertissa  
 Ar paour qès Pêr oll deselet ;  
 Evit me beza nac'het ganta ,  
 E fot zo dezân pardonet .

#### AR JUDEVIEN.

Antret , Lazar , Martha , Madalen ,  
 Er vag-mâ gant oll dud ho ti ,  
 Evit na sortiot birvigen  
 En buez , ermès anezi ;  
 Ha c'houi , Joseph , deut enni iveauz  
 Assambles gant ho consortet ,  
 C'hoant hon eus e colfec'h ho puez  
 Hac e vec'h gant ar môr longet .

#### LAZAR.

Unan ac'hanomp , eme Lazar ,  
 Zo gant Jesus ressucitet ;  
 Esper a meus e zaïmp d'an douar  
 Hep na vezo nicun beuzet ;  
 Va c'hearezet Martha , Madalen ,

Na gollomp qet a esperanç ;  
 Goechal e sònjac'h penaus biqen  
 N'em gueljac'h mui en ho presanç.

### MADALEN.

Chetu-ni e Marseill arruet ;  
 Va breur Lazar , sermon ar Feiz ,  
 Ha me ya da glasq ur plaç secret  
 Da pedi Doue nos ha deiz .  
 En un dezert e fell dñn beva ,  
 Pel diouz pep seurt compagnuez ,  
 Evit ma ellin liproc'h güela  
 Qeit a ma chomin en buez .

### PINIGEN MARI-MADALEN EN DEZERT.

#### AR PEG'HER.

Dezert leun eus a bep seurt rigol  
 Hac a bep seurt tristidiguez ;  
 Chenchit eta lod eus hoc'h horol  
 Ebars e laouenidiguez ;  
 Ne velàn nemet pep seurt anqen ,  
 Pep seurt poan ha pep seurt tourmant  
 Preparet evit ar Vadalen ,  
 Ne gredàn qet e ve contant .

### MADALEN.

An dezert e pehini e don  
 N'en deveus qet re a c'hrisder ;  
 Er c'hontrol é, n'en deus evidon  
 Nemet memes re a zouçder :  
 Va c'harantez é, pa em angach ,

Da chom ebars en ur groten,  
 Rac ar galon zo bet re volach  
 A die caret ar binigen.

## AN ÆL.

Me zo digasset amâ presant  
 Abers nep a garit maya,  
 Dre ma oc'h eus calz a nec'hamaut,  
 E defaut ur plaç da ouela;  
 Me ho casso da ur plaç secret,  
 Ma viot qement a gostez,  
 Ma ellot qemesq gant ho regret  
 An daelou eus ar garantez.

## AR PEC'HER.

Livirit, penitantes charmant,  
 Petra en eus oc'h oblijet  
 Da zouffr qement all eus a dourmant  
 Var ho corf, ha var ho speret?  
 Rac qement ho cuel bac hoc'h ene  
 A zo ganêc'h oll estonet,  
 Ha pa ho remerqont er guis-se,  
 E sònjont oll e zoc'h follet.

## MADALEN.

Pe me zo vil, pe me zo charmant,  
 Qementse n'eo qet hoc'h affer;  
 Mes va c'halon en em gav contant,  
 Pa ze güir e plich d'am Zalver;  
 Ha c'houi ive, mar doc'h güir gristen,  
 Ha mar d'ê ho calon touchet,  
 Sellit hepken ouz va finigen,

Ha list a gostez va guenet.

AR PEC'HER.

Pelec'h emâ ho servicherien ?  
 Ne velân nicun var ho tro ;  
 Perac e renocet d'ar voyen  
 Abars ma zeo deut ar maro ?  
 Renoncat oc'h eus da ur pales ,  
 D'ar joa ha d'ar gontantamant ,  
 Eguis ma vijac'h innoçantes ,  
 Ha dibourvezet a sqiant .

MADALEN.

Me a meus renoncet d'ar voyen  
 Ha d'an hano deus a vestres ,  
 Ha ne meus mui a servicherien ,  
 Ne meus na maner , na pales ;  
 Qemeret a rân eus a vremân  
 An hano a servicheres ,  
 Ha c'hoas evurus en em gavân  
 Mar em bez lod gant an ælez .

AR PEC'HER.

Ar musq , ar ros hac an oll fleuriou ;  
 Ar bom assambles gant an ambr ,  
 Ne santont qet a voëlloc'h c'hoeziou  
 Eguet ma sanctet en ho campr ;  
 Ouspen , pa zoa ganêc'h parfumet ,  
 Ha c'hoas ornet gant tapissoù ,  
 Hac er groten-mâ n'aller guelet  
 Nemet qenvit ouz mogueriou .

## MADALEN.

Ne gredan qet e cafet ur c'hraou  
 A sante ar c'hoeziou mat-se,  
 Ha gouscoude Mestr an oll madou  
 A choasas ur c'hraou da vele,  
 Ha n'en doa qet a dapissiri,  
 Nemet hepqen foen ha colo,  
 Hac un nebeudic lianennou,  
 Pourveet gant e vam d'e cholo.

## AR PEC'HER.

Guechal o piye compagnuez,  
 Hac e carac'h beza guelet,  
 Hac ho prassa laouenidiguez  
 Voa guelet dont d'ho tarempret,  
 Ne garac'h qet en em gaptiva  
 Da chom oc'h-uan en ho ti:  
 Penos e c'hellit-hu chom amâ,  
 Pa na zeu den d'ho frecanti?

## MADALEN.

Mar e meus caret compagnuez,  
 Bremâ me zetest anezo,  
 Ha va brassa laouenidiguez  
 Eo beza pellet diouto:  
 Me ameus qemeret ur pried  
 A chom ganén bepret amâ,  
 Ha n'ouffe den dont d'am darempret  
 Anez dont d'e zisoblija.

## AR PEC'HER.

C'houi a lavar o c'heus ur pried,

## 16

Ha ne bella qet diouzoc'h;  
 Gant qementse m'en em gav souezet,  
 Rac n'er güelàñ qet ganeoc'h.  
 Nemet dessign ho pe d'am zrompla,  
 Ha rei din comzou da gredi :  
 Livirit din p'en andret e mà ,  
 Evit dojet d'am c'hoatanti.

## MADALEN.

Ar pied a nieus a zo amâ  
 Hac e lec'h all oll assambles ;  
 Me ne fell qet din dont d'ho trompla,  
 Mes lavarat ar virionez.  
 Va c'halon en deveus possedet ,  
 Ha fidel e vezin dezàn ,  
 Na james ne vezin ur momet  
 N'am bezo sonach eus anezàn .

## AR PEC'HER.

Diroji a rit d'ho qalite ,  
 Ha chagrina qement ho car :  
 Ne ranquer qet gouela qementse  
 Evit mont ur veach d'ar gloar.  
 Pelec'h e velit-hu ordenet  
 Rei qement demeus a zaëlou  
 Evit hor pec'hejou tremenet ?  
 Offansi a rit an Autrou .

## MADALEN.

Me ne don nemet ur bec'heres ,  
 Hac a zeu d'oc'h avertissa ,  
 Mar oc'h eus c'hoant da veza eürus ,

Sònjit d'en em gconvertissa;  
 Pa zeo güir nemet dre ar souffranc  
 Ne allomp pretanti repos,  
 Eo ret dont da ober violanc  
 Evit antren er Barados.

### AR PEC'HER.

Ne qet ret deoc'h beza quer presset  
 Da zouffr ur binigen garo;  
 Re abret oc'h eus-y commancet,  
 List ma vezoz tost d'ar maro;  
 Qemer a ellit c'hoas hoc'h amzer  
 Ha dont d'en em rejouissa;  
 En ur moment ec'h ellomp ober  
 Hor silvidiguez er bed-mâ.

### MADALEN.

N'ellomp james beza re bresset  
 Da repari hor pec'hejou,  
 Lies hini zo en em dromplet  
 O credi ur seurt résoniou.  
 Nep piou benac a ra er guis-se,  
 Hac a zifer betec ar fin,  
 En em rent dign a goler Doue,  
 Hac eus a bep faveur indign.

### AR PEC'HER.

Ne remerquer mui var ho pizach  
 Al liou quer vif ha quer brillant,  
 Na veler mui en ho taoulagad  
 Nemet ur regret languissant;  
 Ouspen e zint cazimant beuzet

Mar o list hep o soulaji,  
En bêr amzer e viot souezet  
Pa na servichint deoc'h mui.

### MADALEN.

Va frofit ve, nonpas un domach,  
Em be collet va oll guelet,  
Pa na velfen birviqen james,  
N'em bezo morse a regret.  
Nep piou benac a ra goal usach  
Eus ar mad en deus recevet,  
En em laqa ebars en angach  
Da ober pinijen galet.

### AR PEC'HER.

Na tom na yen n'en deveus noazet,  
Na grêt d'ho genet nep domach;  
Ardeur an eol n'en deus qet poazet  
Nac ho taouarn nac ho pizach:  
Ur parasol hac un evantail,  
Ur mascl hac ut re vanegou  
O piye bepret en appareil,  
Evit conservi ho liou.

### MADALEN.

Pa zeu dîn memor a guementse,  
N'allân qet miret da ruzian  
Gant mez o velet ar vanite  
A galz a dud eus ar bed-mân;  
Ar Verc'hes hac he mab, va Zalver,  
O terc'hel aroc an tyraont,  
A anduras rigol an amzer;

Hep caouet nep soulajamant.

**AR PEC'HER.**

Guechal e teuac'h d'en em admirâ;  
 Ma velac'h ar squeut ho pisach,  
 Ma sellac'h er mezellour bremâ,  
 N'en em anafac'h davantach :  
 Dre ar rigol eus ho pinijen  
 Oc'h eus en laqet da sec'ha,  
 Eguis an delliou eus ar vezen  
 Pa zeuont o-unan da goeza.

**MADALEN.**

Me ne meus qet affer davantach  
 Da seller er mezellerou ;  
 N'e qet ar guenet eus va bisach  
 A fell d'am Mestr ha d'am Autrou ;  
 Va c'halon en deveus gouennet  
 Ha roet e meus-en dezâ.  
 Mes n'er c'haffe james preparet  
 Nemet souffr a rafen da guenta.

Evit mellezour m'emeus chôaset  
 Va Jesus staguet ouz ar groas ,  
 Pini, siouasl a meus offancet  
 Dre bec'hejou hac a zo bras ;  
 Dre ma vean guechal bet qer volach  
 Da denna gloar eus va guenet ,  
 Mes Douevam miro davantach  
 Na guezin en ur seurt pec'het.

**AR PEC'HER.**

Ar blêo caër-se pere a zouguit ,

Ne servichont dêc'h da netra,  
 Na ne zigassint dêc'h nep profit,  
 Nemet dont a rafec'h d'o güerza;  
 Me vel e zint dija neglijet,  
 Noc'h eus anezo nep sourci,  
 Ha gonscoude o deveus plijet  
 En amzer ma teuac'h d'o soigni.

## MADALEN.

Va blêo ameus atao conservet,  
 Hac a rin'epad va buez;  
 Mar o deus servichet d'am pec'het,  
 D'am pinigen e raint ivex;  
 Gant ur parfum sacr int parfumet,  
 Hac en deus ur c'huez excelant,  
 Ne ouffen james o dioñeret  
 Nac evit aour nac evit arc'hant.

## AR PEC'HER.

Pelec'h oe'h eus lajet ho perlez,  
 Bizeyer, carcan, rubanou?  
 Habillet oc'h eguis ur baourez;  
 Ne defe qet eus a vadou;  
 Rac ne velân hremâ semplamant  
 Nemet cos dillat var ho tro,  
 Ha noc'h eus qen evit ornamant  
 Nemet blêo ho penn d'ho colo.

## MADALEN.

Me meus renoucet d'an oll perlez,  
 D'am bizeyer ha rubanou,  
 Evit beza güir servicheres.

## 21

Da vestr an oll berlezennou,  
 Nonpas ma ve pec'het o douguen,  
 Mar grêr usach vad anezo;  
 Mes siouas din, Mari-Madalen,  
 Offancet ameus Doue dreizo.

## AR PEC'HER.

N'oc'h eus qet ur güele da gousqet  
 Hac a ve djouz ho merit;  
 Ho corf tener zo var ar c'halet,  
 Me meus aon n'en em abregit.  
 Guechal e couscac'h var ar c'hoton,  
 Ha bremâ edoc'h var ar men :  
 Ma na guirit chench eus a fêçon,  
 Edoc'h dija prest da dremen.

## MADALEN.

Me a zo en em digustumet  
 Diouz güeleou coton ha plun,  
 Hac emâ a soajit zo calet,  
 A gavân re douç ha re eun.  
 Evit plijout d'am mnia-caret,  
 Eo ret din dont d'e imita;  
 Cousqet en deveus var ar c'halet,  
 Ha me rej iveau eveltâ.

## AR PEC'HER.

Pelec'h ma an amzer dremenet,  
 M'o pijs a bep seurt boejou?  
 Ha bremâ n'o cuerler servichet  
 Nemet a vara ha louzou :  
 Ha n'oc'h eus evit hoc'h oll breuvach

Nemet hepgen dour da eva,  
 Elec'h m'o pije vit boc'h usach  
 Demeus al liqueriou guella.

MADALEN.

Va Zalver en deveus bet yunet  
 Abalamour d'hor pec'hejou,  
 Ha ni en em gav importunet  
 Oc'h imita e exemplou.  
 Ur c'horf zo maguet dre licheri  
 Ne zent james eus ar r̄eson,  
 Hac e zeo ret dont d'en em dompti  
 Dre ar yun hac an or̄eson.

AR PEC'HER.

En divertissamanchou public,  
 Er bal, en dang, en opera,  
 O vont da glêvet cana'r musiq,  
 E teuac'h d'en em divertissa;  
 Eus ho pemp sqianchou naturel  
 O pije pep seurt plijadur,  
 Hac e zoc'h deut bréma quer cruel,  
 N'accordit netra d'an natur.

MADALEN.

An divertissamanchou public  
 A zeue da noazout d'amene,  
 Rac eus a chast e teuont lubric,  
 Peb den zo daonet dre'n hent-se.  
 Comedi, bal, dang hac an theatr  
 A zeu da chench speret an den,  
 Hac a rent iye memes idolair,

Sionas! calz a grouadurien.

**AR PEC'HER.**

N'o cléver qet o cana soniou  
 Evit ea em divertissa,  
 Ha ne sorti mui eus ho qenou  
 Nemet comzou ar santela;  
 Ouspen, lézet oc'h eus an dançou,  
 Elec'h m'ho poa plijadurez,  
 Evit gallout rei huanadou  
 En ur plaç a dristidigues.

**MADALEN.**

Va zeot mar e deus va servichet  
 Evit meuli an aërouant,  
 Me viro en amzer da zonet  
 Ne vezo sur qen insolant.  
 Ar bal, an danç hac an nosveziou,  
 Va Doue, c'houi a voar en oll,  
 Ma na rafen pinijen anezo,  
 A rafe din monet da goll.

**AR PEC'HER CONVERTISSET.**

Goude qement a meus lavaret,  
 O sònjal ho pervertissa,  
 Me vel e zòn gañec'h gonezet,  
 Va c'halon n'ell mui resista;  
 Contraign on da chench eus a gomzou  
 Ha da garout ar binijen;  
 Me ziscuezo dre va oberiou  
 Penos e zoun chenchet a gren.  
 Ha cavet e ve ur femelen

A guer cre resolution,  
 Equis ma zeo Mari-Madalen ?  
 C'houi zo penitantes güirion.  
 Graçou bras oc'h eus digant Jesus ,  
 Recevet oc'h eus ar voyen  
 Da renta ar bed , ar c'hiq confus ,  
 Satan hac e servicherien.

Me ameus qemeret calz a boan ,  
 Ha ne mens netra gonezet ,  
 Da servicha piou? nemet Satan !  
 Eur vez eo din e lavaret :  
 Ha me a voa deputet gantàn  
 Da zont d'ho teati , Madalen ,  
 Ha c'houi zo bet trec'h din ha dezàn ,  
 Ar pez ne gredjen birviqen .

#### MARTHA.

Na servichit jamez mui biqen  
 Ur mestr hac a zo un tirant ;  
 Sulgui e servichit e lezen ,  
 Sulvui e reï deec'h a dourmant ;  
 Qemerit Jesus da gabiten ,  
 Hac en em anrolit gantà ,  
 Ha mar dòn-me Mari Madalen ,  
 En em gontantit anezà .

**FIN.**